

## Vie des campus

Sur les campus de Rennes et Saint-Brieuc, l'Université Rennes 2 offre aux étudiant·es un environnement de qualité et tous les services indispensables au bon déroulement de leur formation.



Une **vie associative intense** anime la vie de l'université. **Une centaine d'associations** culturelles, humanitaires, sportives ou encore militantes proposent tout au long de l'année des concerts, des forums, des festivals, des semaines d'information et des rencontres.

Avec une **saison culturelle pluridisciplinaire** proposée sur les campus, et de nombreux lieux dédiés à la diffusion culturelle et artistique, les étudiant·es ont accès à une **offre culturelle riche et diversifiée**.

Très présentes à l'université, les activités physiques et sportives relèvent des formations générales. Le **Service inter-universitaire des activités physiques et sportives (SIUAPS)** propose **près d'une quarantaine de disciplines**.

Sur les campus Villejean (Erève) et Mazier (RDC du bâtiment C), le **point santé** reçoit **gratuitement** et en toute **confidentialité** les étudiant·es pour des **consultations médicales**, des **interventions sociales** ou des **consultations spécifiques** (diététique, contraception, sophrologie et relaxation, suivi psychologique, formation aux premiers secours, etc.).

Le **Relais handicap** de l'Université Rennes 2 coordonne de nombreuses actions destinées à **accompagner les étudiant·es** en situation de handicap, qu'il soit **permanent ou temporaire**.

## Ar vuhez war ar c'hampusoù



Kampusoù Roazhon ha Sant-Brieg zo daou lec'h a-zoare ma c'hell studianted Roazhon 2 kaout kement o deus ezhomm da gas o studi da benn.

Ar c'hevredigezhioù bev-buhezek a zigas birvilh d'ar skol-veur. Ur c'hant kevredigezh bennak, o labourat war dachenn ar c'hultur, ar sikour d'an dud, ar sport pe c'hoazh ar stourmoù a bep seurt, a sav, a-hed ar bloaz, koñserchoù, foromoù, festivalioù, sizhunvezhioù kelaouiñ ha bodadegoù.

A-fed kultur hag arzoù e c'hell ar studianted gwelet kalz a abadennoù a bep seurt, ha kement-se a-drugarez d'ar sezon abadennoù o tennañ da veur a dachenn studi a vez aozet war ar c'hampusoù, ha d'an niver bras a lec'hioù graet espres evit an dra-se.

Ar sport a gemer kalz a blas er skol-veur hag a ra parti eus ar stummadurioù jeneral. Un daou-ugent bennak a sporchoù a vez kinniget gant ar SIUAPS, servij ar sporchoù er skolioù-meur

War gampusoù Keryann (Erève) ha Mazier (traoñ ar batis C) e c'hell ar studianted o deus ezhomm mont da gaout digoust ur medisin pe ur skoazeller.ez sosial, hag hep na vije roet da c'hoût da zen. Moaien zo ivez d'en em gaout gant ur medisin spesializet war an dietetik, ar gontresepsion, ar sofroloji hag ar relaksasion, an diaezamañchoù psikolojik, ar stummañ war ar sikourioù kentañ, hag e-se.

Burev an dud ampechet e skol-veur Roazhon 2 a ra traoù a bep seurt evit sikour ar studianted-se, pe e vije o ampech da badout pe get.

Fichiers associés

[Guide de l'étudiant·e - Rennes](#)

[Guide de l'étudiant·e - Saint-Brieuc](#)

[Guide Transition socio-environnementale - Rennes](#)

[Guide Développement durable - Saint-Brieuc](#)